




KANTIK

evit gouel ar Mammou

Sur l'air du cantique: *Prier, c'est le bonheur.*

DISKAN

*Selaouit, Gwerc'hez Vari,
Gwerc'hez bepred dinam
Bugale deut da bedi }
Da bedi 'vit ho mamm. } bis*

I

Pa voemp ganet, raktal
Hor Mamm ker mat, ken tener,
Ne baouezas da daoler
He mouze'hoarz war hon tâl.

2

En hor c'havelig kloz
War he bugale vihan
He deus beilhet eb ehan,
En deiz koulz hag en noz.

3

Krog en he dourn, hon eus
Grêt hor c'hammejou kenta,
Ha war hent striz ar bed-man
Desket ober hon treuz.

4

Eun hano dudius
Hon eus abredig desket,
War he barlen azezet:
Hano Santel Jezus!

5

Desket hon eus ouspen,
Kroaziet hon daouarnigou
Evel an eledigou,
Lavaret hor peden.

6

Var hor c'halonou paour
Pa deu poân ha trubuilhou,
Raktal e sec'h hon daelou
Gant eur gomz a dalv aour.

7

Breman p'omp deut en oad
P'eo digor hor esperejou,
Merkomp gant hor pedennou
Hon anaoudegez vat.

8

N'ankounac'haomp ket
He c'henteliou a furnez
Dre-holl ha doug hor buhez
Karomp hor Mamm bepred.

9

Nann, dezi na raïmp mui
An disterra poan-spered,
Rak den n'en deus hor c'haret,
Biskoaz kement hag hi.

10

Holl kanomp a vouez-penn:
Henor ha gloar d'hor Mammou!
Dezo, gant hor pedennou,
Hor c'halon da viken!

TREOURE.